


SANT VIEZO

St Vougay?

— DISKAN —

O Sant Vezo benniget.
 Patron karantezuz,
 Ouz ho parrez ni ho ped
 Grit eur zell truezus
 Lakit en hor halonou
 Sonjou bepred kristen,
 Ma vezimp holl en enrou
 Evuruz da viken.



I

Evit donet da gelenn
 Bugale Bro-Arvor
 O peus lezet Bro Eren,
 O peus treuzet ar mor,
 Entanet gant youl Doue,
 Lezet o peus pep tra,
 Madou hag enor ive,
 Paour ran oc'h deut aman.

II

Pa zouarchot e bro Breiz
 Pevarzek kant vloaz zo,
 E kavjot ar Baganiz
 Strevet holl dre ar vro ;
 O beleien Drouized
 A adore an heol,
 O lidou a oa kalet
 O buhez a va diroll.

III

Setu deuet eur vagad
 Euz a zent Breiz-Uhel ;
 Dre an Arvor, an Argoat
 E n'em ledont a bell.
 Prezeg à reont Jezus
 D'an arvoris difeiz,
 Hag an Drouized, mezus
 A rank tec'het euz Breiz.

IV

O sant Vezo benniget
Patron karantezuz,
Arc'heskop oe'h bet hanved
Ker bras oa ho vertuz.
Skuillit var n'om, ni ho ped,
Ho pennosiou gwella,
Evit ma vezimp bepred
Kristenien vad er bed ma.

V

Lakit en hor halonou
Gwir garantez Doue;
Lakit en hor sperejou
Feiz birvidik ha krenv.
Ha war hor Bro Breiz-Izel
Skuillit bepred bennoz,
Ma chomo bepred fidel
Da feiz hon tadou koz.

